

R° 620 B

H

FRAGILITE AN DUD YAOUANC

Var eun ton rigolo

Ni Loa eur hoguic yaouanc oa duman guenem-ni
 Oa commanset do gana, mes brema-na ra mui
 Eun nosvez goude a goan, o tont eur zonj ne ben
 Me a renk mont en noz man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mez
 Da glask e merh Perina, digant an intavez
 Pe guir ou hanvet coguic, gant oll dud ar vro ma
 Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa..

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj
 Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj
 Perin merh an intavez, hounez a zo dam grad
 Kannerez a danserez, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intavez, setu me deut exprez
 Da glask ho merh Perina, da hanter tieguez
 Rag keit a ma vemp yaouanc, or bo contentamant
 A plijadur assambles ep chagrin na tourmant.

Ma merh me zo abredic eur blavez hoaz
 Mar de content ar buguel, me na ranket a gaz
 Kousket eo en e quele er pen draon an ti
 Monet a ran de havet, da houlen diganti.

Arsa ma merch emozi, na din me levered
 A houi zo content paouric, de gavet eur pried
 Berroh kaffet an amz er, breman epad an anv.
 A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goany.

O ya va mam emezi, certain me zo content
 Demeus a greis ma hrlo, da gaoul eur pot zaouank
 Mar dsi caner a danser, ac eur pot delicat
 Neuze a meus esperans, d'ober tieguez mad.

Neuze ar pot yaouanc man, a zo jaoüs a guie
 Ac a zistroas d'ar gaer, hed an hend neur gane
 Penos eta yan goguic, te zo bet o vale
 Eun tam mout divezat, o hanons domp an de.

Neuze zistroat ouzin, gant eun air da hoarzin
 Mar de guir on me koguic, houi so eur locarn fin
 Houfi pefe eur vadelez da vont breman ractal
 Da anons ma dimezi, betec ar presbital.

Ar hoarz var ma muzellou, pa non ket vit miret
 Ya va mignon emezan, me rei ze na reket
 Monet a ran evidoh, betec ar presbital
 Rac merh an intavez, evidoh ne ket fal.

Bonjour doh autre person, me a zo deut gant prez
 Da hout a houi zimefe, eur hok ac eur bolez
 Pere s deus dezir braz, da veat unisset
 Eun tamic a zo dija, o deuz en em choazet

Neuze a respondas d'in, ive neur vous hoarzin
 Deus aman abars zal, kemer eur bane guin
 Eroët ezout bepred, eun tamic de kevyer
 A teus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Ezkuzit aotrou person, mar meus drouc parlantet
 Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet
 A re a barlanton doh, a zo daou zen yaouanc
 A zezir be unisset, vel diou galon gontant

Ar re a barlanton doh, zo mal a fumelen
 A zezir bea staguet, gant ar memez chaden
 Unan ane triveh vla, an hini all pemzec
 Zo pel zo braz en hirvoud, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dout dan illiz
 A me o interrojo. var dern a hatekis
 Pa ergoulet digante, a na ouient netra
 Demeus ar sakramanchou, a re brinsipalla.

Filet dar guer bugale, evit eur bloa pe daou
 Da hortoz ma po desket, dern ar zakramanchou
 Neuze zavas e ziou skoa, me a grad a zonje
 Lan druez eo emezan, dimezi bugale.

Neuze a zeuont dar guer, o daou en eur ouela
 Ret a vo demp emezo, donet da studia
 Ret a vo demp studia, couls an de ac en noz
 Mar ouefomp ket re neve, ni zesko a re goz.

Tri pe bevar miz goude, a ya an intavez
 Da gaoul an aotrou person, da lard dan tol evez
 Rac va merh zo languissant, eun tammic zo dija
 Senl vui avans e klenvet, ya beped vai vella.

Setu an aotrou person, dezi neus lavaret
 Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet
 Houfi a fad daou zen yaouanc. a lavar ar person
 Ar oar nem convertissa, ep mont d'ar mission.

Ar memez tra ez int bet, dimeed ac eureujet
 Gras da vea eurus, keit a vont var er bed
 Bonheur a zeziromp de, keit a von er bed ma
 A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves.

